

(203, suite)

Kanaouen
ar C'hrampoez.



(204)

Un daou pe dri devez a zô
Emâ va zoaz - krampoez e gô ac'hân!
Emâ va zoaz - krampoez e gô.

Rak va c'heuneud a zo er c'hoad,
Ha va bouc'hel a zô didroad ac'hân!
Ha va bouc'hel a zô didroad.

[ajouter: va,
qui est oublié
par Lédan.]

Ha va amann zô er marc'had,
Ha bleud zô c'hoaz ô valad ac'hân!
Ha va bleud zô c'hoaz ô valad.

Ha va greber zô e Landreger,
Ebars er c'hôvel oc'h ober ac'hân!
Ebars er c'hôvel oc'h ober.

Ha va spanel zô e Montroulez,
Ha va rozal e Karakes ac'hân!
Ha va rozal e Karakes.

Ha va fillig zô e Perros;
Allas! chetu deuet an nôz ac'hân!
Allas! chetu deuet an nôz.

Je dois cette chanson à l'obligeance de M. Th. de
la Villemarqué. juillet 1836.

(Vol. IV, p. 203-205.)
6 str. numérotées.